

Merser (?) – Skourr Ar Skourr (Hañveg 1811 – Montroulez) 1870).
Modernnaet eo bet an doare-skriva.

Evid trugarekaad an Aotrou Ar Skourr

Me a garje, Aotrou Ar Skourr,
Barz Rumengol, barz Gwir-Zikour,
Kaoud mouez flour en eostik-noz
‘Vid kana da yaouank, da goz.

Me am-bize neuze kanet,
Heb ehan, Tad an Oll Varzed,
En-deus savet mui a werzio’
Evid hini all euz ar vro.

Telegg Wenhlan, telegg Varzin,
N’o-deus ket sonet kel lirzin,
Dre ne ganent ‘vel hoh-hini
Doue, ar Zent, ar Feiz, Mari.

Ni oll Barzed, ni a veulo
Telegg Wengamp bete ‘r maro :
Ra vo ganeoh bennoz Doue
Ha gand ho tud a re da re.

Yann-Vari ar Merser
Kure e Gwengamp.